

# Ar ganaouenn ETREBROADEL Lakaet en brezoneg gand Marcel Hamon

War-zao, tud daonet an douar.  
War-zao, an dud paour o-deus naon.  
Ar skiant a hop hag a lavar  
Skei ar bed 'n eun taol d'an traoñ

An traou koz a hall moned pell,  
Mevelien gêz, war-zao, war-zao !  
Sklepom anez a-benn bouell  
Skuiz om o veza esklaou

*Ar hann diweza a zo  
Oll a-raog, ha souden  
Breudeur dre-oll a vo  
E leh enebourien*

Nann, nan-eus ket a zalver braz,  
Na Doue, na mestr, na hini all.  
Produer, krog e-barz da benn-baz,  
'N em zaov da-un gand ar re all  
Da lak' al laeron da vond da goll  
Da sklêrijenn ar spered.

On hovel 'c'hwezom 'ta dre-oll  
War houarn tomm e vez skoet.

Mahet a vem ar pezh zo permet  
'N em wada rankom 'vid paea.  
Ar pinvidig 'n-eus dever ebed,  
Ar paour zo mad da vahata  
'Dan ar vaz o plega on chouk.  
Deveriou ha droejou da bep den  
Skuiz ez om o chom atao moug.

Sellit pebez pennou 'zo dioute,  
Rouez ar glaou, an hent houarn.  
Biskoaz 'n-eus greet ar baotred vraz-se  
Nemed ober 'vel al louarn  
E-barz ar prejou, an Aotroune.  
Ema on labour hag on foan  
Mankoud ra dem tapoud ane,  
Petramant chom atao dindan

Ar roue a veve ahanom ive  
Peuh etrezom, tan d'ar re wask  
'Blegom ket ken bremañ d'an arme.  
En teil, lakom fuzul ha kask  
Med, ma 'deus c'hoant an dreberien dud  
D'ober dem evel al loueou,  
Ar fuzul ne chomo ket mud  
Hag evite 'vo an tennou.

Ouvrier, peizant, mom a-bez,  
Ar bobl vraz euz ar re 'deus poan.  
An douar n'hell ket beza dezo.  
N'eus ket ar blas d'ar feneant.  
Ped 'zo o veva deuz on gwad,  
Med ar brini a zo war-dro  
'N o foñs, pa 'devo bet on zroad,  
Neuze an heol a lugerno !